

Yezhoù Bihan

Gilles Servat (Sony Music Publishing)

Yezhoù ma vez graet bihan ac'hanoc'h
Evel ar stered o strinkat brozh an noz
Ha petra vefe al loar hep ho skedoù
Med ur gouloù nemetan 'kreiz an egor goullo

Yezhoù ma vez graet bihan ac'hanoc'h
Evel gwad hag aour bokedoù ar prajoù
Ha petra vefe ar geot hep ho garmoù
Med laonenoù oll henvel en ec'honder unton

Yezhoù ma vez graet bihan ac'hanoc'h
E giz inizi war ar mor bras hadet
Ha petra vefe ar mor hep ho glasted
Nemed irvi hag irvi hep diwez an tonnoù

*Langues que l'on dit minoritaires
Pareilles aux étoiles éclaboussant la jupe de la nuit
Que serait la lune sans vos éclats ?
Une lumière solitaire dans l'espace vide*

*Langues que l'on dit minoritaires
Pareilles au sang et à l'or des fleurs des champs
Que serait l'herbe sans vos cris ?
Des lames toutes identiques sur l'étendue monotone.*

*Langues que l'on dit minoritaires
Pareilles aux îles sur l'océan semées
Que serait la mer sans votre verdoyance ?
Les sillons et les sillons sans fin des vagues.*